




Kantik Sant Alar

PATRON ILIZ MESPAL



Ton : Pange solemnes.

DISKAN

O Tad Sant Alar, Patron ker hor parrez,
Ni deu d'ho meuli herio gant levenez ;
Selaouit bepred hor mouez, hor pedennou
Euz bar an envou.

I

Dre ho lealdet, ho labour ijinuz,
E lez eur rouë braz c'houi deuz gallouduz.
Dre ho kuir furnez mignon braz da Zouë
Ha Sant braz ive.

II

A voal glenvejou aliez hor loanet
Dre ho pedennou a zo bet paret ;
En amzer da zont grit c'hoaz dre chras Douë
Ma kavint pare.

III

Skoer ar gristenien aman var an douar,
Patron gallouduz en env leun a c'hloar,
Var ho pugale pedit Douë da skuilla
He c'hrassou goella.

VI

Grit ma karimp Douë dreist an oll draou krouet,
 Dreist omp hon unan, dreist an oll dud er bed ;
 Hag euz ar pec'het dre nerz ar garantez
 Ma tec'himp bemdez.

V

Grit ma vimp bepred tud eün, tud leal,
 'Veldomp hon unan ma karimp an dud all,
 Ma roimp d'an oll dre hor madoberou
 Skoer a vertuziou.

VI

Grit ma vimp sentuz da lezennou Douë,
 Da vouez an lliz ma vimp sentuz ive ;
 Rag sentidigez ervez an Aviel
 A ra bñez santel.

VII

A hed hor buëz, bemdez var an douar
 Ni dle labourat, gouzanv poan ha glac'har,
 Mez poan ha labour gant Douë benniget,
 Zo frouezuz meurbet.

VIII

Grit ma zeï eun deiz d'an envou d'ho meuli,
 Da veuli Douë hag ar Verc'hez Vari,
 Da veuli ar Zent, da veuli an Elez,
 Oll dud ar barrez.

Y. M. M^{essager} miss. apostolique

Imprimatur, *de la Congrég. des Sœurs
 du St Esprit.*

Quimper, le 17 Décembre 1904.

F. CORRIGOU,

Vic. Gén.

Morlaix, Imp. Le Goaziou.